


AR MISION BRAZ

E


LOGUIVY-PLOUGRAS

Er bloavez 1890, ar Zul kentan here


DISKAN.



Deut oll prim kris - te -



nien, Deut oli d'ar Mi - si - on, A zi - go - ro bre -




man e-barz zant Mi - li - on, A zi - go - ro bre -




man e - - barz zant Mi - - li - - - on.

POZ KENTAN



Gwe - chal ann tad Ma -



ner, warlerc'h Mi-chel No-bletz, Mi - si - o - no kru -

det d'hon zud koz a ro--ez, Mi-si-o-no bru-

det d'hon zud koz a ro-ez.

Ar brezel, ar gernez ha c'hoaz gwalenno all
A ledaz var ar vro evel ann noz tenval. (*bis*)

Bretoun n'anavee na Doue, na lezen ;
Pagan a oa muioc'h evit na oa Kristen.

Trist meurbed eo sonjal na paour oa Breiz-Izel,
Mez Doue d'he zalvi a gavaz tud zantel.

E Treger, e Leon ha dreist oll e Kerne,
E prezeguent, noz de, lezen zantel Doue.

Ann hol, koz ha iaouank, den jentil, bourc'hiz, Kouer
A zirede war lere'h ann daou visioner.

Re vian e vije ar brasan ilizou
Da zigomer ann dud a deue d'ho silaou ;

Ha war grap eur menez, euz eur roc'h vraz harpet,
E sarnonent d'ar bobl en draonien don bodet.

Kalz brawoc'h eo kontan ar stered deuz ann noz,
Evit ann dud ho deuz kaset d'ar baradoz.

C'houi oar, o ma Doue, c'houi oc'h euz kurune
Ped den o vont da goll ho deuz neuze zalvet.

Evel d'he hon euz c'hoaz daou dad misioner :
Ann tad Rod a laran hag ann tad Neweder.

Dallet mik gant satan, spered ann den dife
A lue'h dre nerz ho c'homz, a sklera vel ann de.

Ho veden, ho daelou, ho c'harante dener
A vraill, gant ar glac'har, kalon dir ar pec'her.

A bel zo, o tad Rod, c'houi drec'h ann drouk-spere ;
Aman vad c'houi vlastro ann erouan milliget.

Bugel zant Milion, o tont da Laguivy,
Ar goad a vervo zur ebarz oc'h izili.

Aman deuz ho kalon, kenvroiz a domo ;
Hep dont d'ar Mision, biken den na chomo.

Beleien ar c'hanton hag ar c'hantonio all
A deui. . Ann Diaoul ac'han a renko mont raktal

En eur vont e iudo !.. Gaoū, blasphem, na maloz.
Parjur na zakrilech na vo ken er baroz.

Jezuz a ziskeno e kalon pop hini ;
Doue vezo roue war baroz Loguivy.

Ar gristenien gentan na rent nemert unan,
Kanan rent kantikou en eur vervel en tan.

Penez n'ho deuz ive nemert eur wir galon.
E vo laret zouden deuz tud zant Milion.

Goude ar Mision ho lavar a vezo :
« Biken lezel ar fe, kentoc'h mont d'ar maro. »

Hon zad, hon mam gentan er barodoz-douar,
A zantaz eur pennad eur blijadur dispar.

Deuz Kerborn, d'ann Dresnay, Kergelen da Vefo,
Eul levenez paduz, eur joa leun a vezo.

Bugale Loguivy ha c'houi amezeien,
Deut eta da silaou ar visionerien.

Evit ho tigomer, lec'hiou na vanko ket,
Iliz vraz Loguivy frank a vo digoret.

Ar c'hleier o son drant en tour kaer hag uvet.
C'halvo d'ar Mision bugale Breiz-Izel.

Hon fec'hejo, gant joa, Doue ho fardono ;
Hastomp pe vo spontuz warc'hoaz de hon Maro !

Hastet... Mar g'oc'h breman deuz tol vad azeet.
Warc'hoaz war ar vaz kaon e vefet gourveet ;

Breman mar kutuillet rozenno flour hep spern
Warc'hoaz c'houi a lonko tan devuz-ann ivern !

Deut eta, pec'herien, da silaou moez Doue ;
Mar red skouarn vouzard ho pezo keun goude.

Ar Werc'hez, zant Ivy, zant Milion, zant Loeiz
E vo deuz ho kortoz, gant sant Ervoan, sant Breiz.

Nag a vec'h hep deillou, dizec'h vel eur ween,
C'houi vleunio alare dre nerz ar binijen.

Droug-Ele ann ivern a skrijo... Mez Jezuz
A rei neuze warn'oc'h eur c'hoarz karantezuz.

Jezuz en tabernakl, ha kalz eie gant han
A deuo p'ho kwelo gant joa d'ho priatan.

Unaned a galon, er bed-man, de ha noz,
C'houi vo eüruz gant han bepred er baradoz.

Graso d'oc'h, ô Jezuz, a rentfomp a galon ;
Aman den na chomo hep dont d'ar Mision.

Evel-se bezet groet.

Imprimatur :

Brioci, die 30 septembris 1890.

A. DUBOURG, *vic. gén.*